



CHANSON NEVEZ

Var sujet ur Filouter en deus tromplet e Hostis.

Var un ton nevez.

Me ho suppli, oll tud yaouanc, da zont da glêvet
Ur son meurbed divertissant a nevez compost,
A zo grêt da un den yaouanc, ur filouter fin,
Mar ententet, ar farç plesant a rai deoc'h c'hoarzin,

Arabat eo, compagnuez, ober dioutân :
 Bote re a filouterien so dre ar vro-mân ;
 Nemet hepqen avertissa an oll hostisien
 Da ziouall na zeuint da loja ar filouterien.

An den-mâ a oa brao guisqet, un den a fêçon,
 Me sonch din e voa guinidic demeus a Leon :
 Squis e voa er guær, re vaguet, meur a hini so,
 M'en deus laqet en e speret mont da redec bro.

E Montroulez hac e Guengamp, e Treguer eo bet,
 E Sant-Malo, hac e Dinan, hac e Sant-Brieuc ;
 Partout oa o clasq e fortun, o poursu e chanç,
 Arc'hant en doa casset gantân bars en abondanç.

Baleet en deus bete Paris, ar filouter fin ;
 E yalc'h a so deut da blada souden alafin :
 Distroet eo bet d'an Naonet, ha bet e Roazon,
 Hac anfin e zeo bet manqet e bourvision.

Evel ma voa bet custumet da ober cher vat,
 Evit ar vech e voa maguet calz re dilicat,
 E qemeras effrontiri da c'houlen loja
 Ebars en un hostaliri, n'oa diner gantâ.

Evel ma voa quer brao guisqet, en ty eo antreet :
 Bonsoir, emezàn, va hostis, ha me vo lojet ?
 Coania fell dlin em plijadur en ti-mâ fennos,
 Hac iveau eva ur banne abars n'em repos.

Servicher, eme an hostis, va mignon antreet,
 Servichet e viot a dra certen ar pez a guerfet :
 Azeet amâ en ur gador e qichen an tân ;
 Qemeret ur banne da eva da c'hortos ho coan.

Servichet e oe va mignon eus a guement mad
 A zeshire e galonic a draou delicat.
 Guïn Bourdel demeus ar guella, hac iveau guïn Spagn,
 Ha liqeur an excellanta tout da vab ar c'hagn.

P'en devoe debret hac evet, c'hoariet e roll,
 D'ar plac'h en deveus lavaret : diservichit an dol ;
 Tennit ho plajou, boutaillou, iveau ho cuerent,
 Va c'hassit d'am c'hampr da gousqet d'ur gueleqempen.

Amâ e commanças nec'hi brema'n den yaouane,
 Penaus e paeje e hostis, n'en devoa qet arc'hant :
 Evet emeus guïn, emezàn, ha grêt ameus cher ;

Petra rin-me evit paea, n'emeus qet un diner?

Epad an nos en e vele e oa chagrinet,
O sonjal en e baemant, n'alle qet cousqet :
N'allin qet mont eus an ti-mâ certen e nep guis,
Ma ne allân caout ur voyen da baea'n hostis.

Guelit bremâ ar finessa eus ar filouter fin :
Un diou pe deir heur qent an de e yas er jardin ,
Buan e zeo bet commancet da doulla an douar,
E vragou en deveus plantet en toul-se ractal.

P'en doa enterret e vragou , e yas en e vele ,
N'euze n'em laqas da gousqet da c'hortos an de ;
Gout a rê mad, ar filouter, e teuje aben
Da ober d'an hostis paea ar scot pen-da-ben.

Antronos vintin pa savas evit partial,
Pa ne gave qet e vragou, e commanç crial :
Fors! va mignonet, emezân ; sicour, me ho ped,
Ha va arc'hant ha ya bragou a so tout laeret.

An hostis hac an hostises d'an nec'h so pignet;
Chomet e repos, den yaouane, petra so c'hoarveet?
Hac e ve collet ho pragou, se n'en deo netra,
Arabat eo hon decria, ni ya d'e baea.

N'en deo qet hepken ar bragou am gra chagrinet,
Va oll arc'hant a voa ennân : me so ruinet.
Beza voa certen en arc'hant hac en aour melen
Daou c'hant scoet, ha pêvar real n'em gave ouspen.

Fouillet e voa bet dre an ty ar servicherien,
Mevel, mates, pautr marchossi, bugale oe'h-pen :

En a voa sur oc'h e affer a grie beprét :
Penaus e zin-me d'am c'harter, tout e zòn laeret.

Ententit, emezàn, hostis, bars e bêr langach ;
 Ma na rentit dlin va bragou, me rei deoc'h domach ;
 Evidòn me gavo testou, pa vanqfe cant dlin ,
 Penaus ne oan qet divragou pa zeuis d'ho ty.

Evidòn-me so den honest, mar deus er c'hontre ,
 Ne fell qet diu ho ruina, pell dioc'h qementse ;
 Roit dlin ur bragou mezer ha cant scoet oc'h pen ,
 Me bardono deoc'h an anter, ne c'houlennàn qen.

An hostis hac an hostises eus a galon vad
 A gont dezàn prest e gant scoet tout en ur yalc'had ,
 Hac iverz ur bragou nevez eus a vezer Saos ;
 Ar filous o c'hemer buan, pa voa mad e gaos.

Rei a rejont da zijuni dezàn qent partia ;
 P'en doa pardonet an anter, o doa joa ountâ :
 Pront hep sellet en dro dezàn e zeo partiet :
 Qenavezo, hostises, emezàn, ar c'henta guelet.


Abars nemeur goude'n hostis o terri ar jardin ,
 En deus cavet bars en douar bragou ar pautr fin ;
 Hac én o commanç da grial eus a bovez e benn :
 Houmâ so tro ur filouter ! ha me so un azen.

Qement hostis so er vro-mâ a ranqfe donet
 Da ober goab eus ac'hanòn ; bremâ me so baro tiet :
 Collet emeus eta cant scoet, ur bragou mezer ,
 Ha c'hoas emeus lardet e gof d'am fripon tam laer.

Bremâ e teuân da avertissa an oll hostisien
 Ma tiouallint dre guement-mâ ouz ar filouterien :

Na dleont qet en em facha evit e glévet,
Din-me va-unan ar goassa, me so goall diet.

FIN.



CHANSON

A R C'HORN BUTUN.

OCorn charmant, plijadurus,
OCorn carguet a remejou ;
Tortillat butun moguedus ,
Te so leun a vertuziou !
Te c'heus ar vertuz spicial
Da renta pur ha neat
Demeus va oll humoriou fall
Va empen, va daoulagat.

C'houi, labourerien an douar ,
Squis, fatig o labourat ,
Taolit ho pal, ho tranch, ho mar.....
Deut da lacat eur c'horniat.
En eur féçon miraculus
Ho courach prest a gresco ,
Dre vertuz ar c'horn moguedus ,
Ho corf mad a labouro !

Estomagou casi breinet,
 C'houi a deul a dorchadou
 Demeus ho peultrinou carguet
 Ar c'hlaustr ouc'h ar mogueriou ;
 Lonqit guinaouadou moguet,
 Ho pilou a zissipo,
 Hac hoc'h estomac pur rentet,
 Evel cleyer a sono.

Ha c'houi, doulagad coarennnet
 A red evel diou feunten,
 Evel caouennet n'ellit qet
 Supporti ar sclérigen ;
 Premit corn butun, liassen,
 Fumit, moguedit outo,
 Hac evel ouc'h diou stereden
 Ho taoulagad a vrillo.

C'houi, pennou teval, chagrinet ,
 O compren ho maleuriou ,
 C'houi, tud a grandeuriou ar bed ,
 Hep caout outo remejou ,
 Sentit ouzin, ha qemerit
 Hep morse sonjal enno ,
 Ho corn, ho putun da fumi ,
 Ho chagrin a dremeno.

C'houi, espernerien d'an arc'hant ,
 Ouc'h ar beorien, tud cruel ;
 C'houi ives, tud cre, tud puissant ,
 James ne sonjit mervel .

00001

Fumit hac e velot certen
 Evel ho poulliou moguet,
 Ho pñez er bed-mâ dremen
 Hoc'h arc'hant n'ho souten qet.

Tortillat butun ravissant,
 Pa cuelân e ludui, •
 E seblant din guelet patant
 Va c'horf trist o consommi.
 Pa remerqân va bouill moguet
 O vont pront gant an avel,
 E seblant din guelet bepret
 Imach va buez mortel.

Tabatieren, arc'h allianç,
 Closen, couffr a loustoni,
 C'houi oll a lezân er silanç,
 Pa n'ellân qet ho meuli,
 N'oc'h eus qet qen vertuz nemet
 Da intra an empennou,
 Da derlussennat ar guenet,
 Pa guezit a dorchadou.

Evel ouc'h an amann rouset,
 Pe vardos chiminalou,
 Emâ ho fronellou, merc'het,
 O cueza a veradennou
 Eul liqueur, poeson accusus
 Var fleurennou ho qenet
 An tenzor-se qer precius
 Espernit-én, p'oc'h pedet.

Ne zeus netra quer coant er bed,
 Da zaoulagad ur fumer,
 Evel ur c'horn brao culottet :
 Se en rent meurbet fier.
 Pa vez en e zorn un diren,
 Un tam tont, hac ur men-tân,
 Ne alfec'h biжен caout un den,
 Qen occupet eveltân.

Sellit demeûs ur fri butun,
 Bepret leun a loustoni
 Ha guelit hac én so nicnn
 A fumerien evelti....
 Ur briserez a souill bepret
 Godel, piecetezen ;
 Ur fumer, bepret so guelet
 O scarza neat e biben.

FIN.